

208452

EUNN HEUR
ADORASION

GREAT

Gant ann Aotrou LE BAIL

PERSON KANTON GUTEVEDE



E LANDERNE.

Moulet e ty J. DESMOULINS,

Rù Lafayette, 7.

1913.



63
212
83
663



Pedomp atao hag, eb ehan, kor
Zalver Jezus-Krist er Zakramant
Meulet ra vezo !

BRURIEZ

ADORASION AR ZAKRAMANT,
MEULET RA VEZO !

Breuriez ann adoration a zo eur
vreuriez euz ar re gaerra hag euz ar re
dalvoudussa evit hor silvidigez. En eur
dremen eunn heur bep miz, da zul, pe
da eunn dervez all euz ar sizun, dirag ann
Tabernakl, oc'h adori hoc'h Zalver Jezus-
Krist, kuzet dindan doareoù ar bara er
Zakramant Meulet ra vezo, e rentomp
dezhan ann enor, ar respet, ar zentidigez
hag ann doujans dleet d'hor c'henta
Mestr ha d'hon Doue. Rouaned ar bed a
vez nos-deiz, e tal dorr ho falez, sou-
dardet evit ho diouall, hag ober enor
dezho. Perag kristenien eur barrez, ne
deuffent ket d'en em glevet etrezho, da
zont, a rumm-da-rumm, da dremen eunn
heur bep miz, e tal dorr ann Tabernakl ?

N'eo ket kals a dra ; ha kementze a ziskueffe goulskoude d'ann oll, pegen birvidik eo ho feiz, bag ho c'harantez evit hor Zalver benniget.

Setu ama ar pezh a lenner enn eur gemennadurez skrivet d'ann eizvet a viz guengolo, 1835, gant ann Aotr. n'Eskop de Poulpiquet, pa renevezas ann Adorasion Perpetuel enn Eskopti :

« Hor breudeur ker, dont a reomp da renevezi enn ho touez ann devosion, a rear anezhi, Adorasion *Perpetuel*, Sakramant ann Aoter. Enn hon Eskopti eo ganet ann devosion-ze, enn amzer ann Aotrou du Louet, unan euz ar vrudetta esbibien a zo bet e Kemper enn hon raok. Hon tudou koz a zigemeraz ann devosion-ze gant kalz a joa; hag eur burzud eo gullet pegen buhan ec'h en em skignas, n'eo ket ebken dre eskoptiou Breiz, mes, koulz lavaret, dre ann oll eskoptiou euz ar Franz. »

Er bloaz 1673, Mari-Thereza, eur rouanez leun a zoujans Doue, a ioa var ann trôn. O velet pegen bras oa niver ar gristenien euz ho rouantelez a zalc'he

mad d'ann devosion-ze, e c'hoanteas gullet ann niver-ze o kreski c'hoas; hag evit-se, e pedas hon Tad santel ar Pab, Clement X, da staga, ous ann Adorasion *Perpetuel*, eur c'hrass spirituel bennag. Vikel Jesus-Krist var ann douar a zilaouas he feden, hag a zigoras tenzor ann indulgansou d'ar re a gemerje perzh enn Adorasion *Perpetuel*.

Gregor XVI, ar Pap goueziek a c'houarn hirio ann Iliz, en deuz ivez digoret deomp tenzor ann indulgansou. Eur joa vras eo evidomp en rei deoc'h da anaout.

Enn aviel e lennomp ar c'homzou-ma : « Chom a rinn ganeoc'h bemdez betek fin ar bed. » « *Et ecce ego vobiscum sum omnibus diebus, usque ad consummationem sæculi.* » Nag eo consolant evidomp ar bromessa-ze ! Mez petra verk ar c'homzou-ze ? Daoust ha ne reont nemet prometti, e kendalc'ho Jesus-Krist da vleunia, da zikour, ha da ziuall he Iliz na eneb galloud ann drouk-spered, evit na deui morse da veza treac'h dezhi ?

Kement-se'zo guir. Hor Zalver a zo bet atao hag eb ehan, gant he ebestel, hag

ar re a zo deut var ho lerc'h, hon Tad santel ar Pab enn ho fenn. Pa veler var ar mor euz ar bed, ann Iliz Santel katholic, evel eur vagik dister, taolet ha distaolet gant ann avel foll, eb morze mont d'ar guelede, eo red anzae ema dorn Doue ouz he-sturia, hag ouz he diouall a eneb ann tarziou kounnaret.

Mes madelez Doue, enn ho c'henver, a ia larkoc'h c'hoas. Ann hini en deuz lavaret : « Ne gav ket brassoc'h plijadur eget chom etouez ann dud, » en deuz c'hoanteat beza ganeompenn eunn doare strissoc'h. Pa zisklerie hor Zalver : « Chom a rinn ganeoc'h bemdez betek fin ar bed. » Ar c'homzou-ze, ouspenn ma verkent e tlie sturia ha diouall ann Iliz, a verke c'hoas, e tlie chom ganeomp e guirionez e Sakramant ann Aoter.

Tra estonus ! Jesus, Doue ha den assambles, a zo azezet enn tu deo d'he Dad ebars enn env, hag er memes amzer, e chom ganeomp enn draonien-ma a zaelou ! evinthan da bignat enn env, ne zilezaz ket ann douar ! Ia, pegen burzudus bennak e seblant kement-se guir eo

goulskoude ; ha red eo her c'hredi : ar memes Jesus, en deuz bevet er Judee, epad tri bloaz ha tregont, hag a zo savet enn env dirak he ebestel deiz ar Iaou-bask, a zo plijet ganthan chom e Sakramant ann Aoter.

Her gouzout a rit, hor breudeur ker, eur virionez a feiz eo, merket er Skritur Sakr, prezeget gant ann Tadou santel euz ann Iliz, ha diskuezet sklear dre galz a viraklou.

Pa voa hor Zalver var ar beg douar-ma, kalz a dud a iea d'he heul. Tud klan eb niver a rede var he lerc'h da c'houlenn ar iec'het. Mad ! ar memes Doue a zo var ann Aoter. Pegen bras n'e ve ket hon dallentez, ma n'e deuffemp ket ivez d'her c'haout ! Guir eo, Mab Doue, e Sakramant ann Aoter, en deuz kuzet he c'hloar dindan doareou ar bara hag ar guin ; mes evelato, pegen dister bennag en em laka, n'eo ket nebeutoc'h eunn Doue oll c'halloudek, ha leun a drugarez. Ma'zeo diskennet ken izel-ze, n'eo nemet evit m'hon devezo mui a hardisegez, ha mui a fizians, da c'houlenn

diganthan kement hon deuz ezom. Pebez karantez !

Ah ! ne glevit-hu ket, enn Tabernakl, he vouez o lavaret deoc'h : « Deuit oll daved-hon, c'hui a zo poaniet ha beac'hiet, ha me a roio deoc'h eunn nerz nevez. » — « Goulennit hag a vezo roet deoc'h. . . . n'hoc'h euz c'hoas goulennet netra. » Deuit eta gant fizians da zaoulina ehars treid ho Zalver, da lavaret dezhan ar poaniou speret, ne gredit, marteze, ho dizoloi da zen ebet ; deuit da lavaret dezhan, dreist oll, sempladurez ha klenvejou hoc'h ene. Ha pa ve ar pec'hed eat doun enn hoc'h ene, ha pa veac'h guasket dindan beac'h rebechou ho kous-tians, ha pa n'e ve mui ennhoc'h netra da blijout da Zoue, deuit evelato. Stouit, ha plegit ho penn dirag ann Aoter ; huanadit var-zu ann Doue trugarezuz, a zo enn Tabernakl. Ac'hano e klevot o tont eur gomz, a lakaio ho kalon da zridral : « Bezit fizians, va mab, ho pec'hejou a zo pardonnet. — *Confide, fili, remittuntur tibi peccata tua.* »

Ha c'hui, n'o peuz ket kavet, e kreiz

ebatou ar bed, ar blijadur a glaskac'h, deuit ivez da ober hoc'h heur Adorasion. Ar bed en devoa great deoc'h promesaou kaer ; mes n'en deus ket dalc'het d'he c'her. E leac'h plijadureziou guirion, n'o peuz kavet nemet eur skeud tromplus, eunn dra goullo ha terchen-nus ; ha breman, beuzet enn distridigez, n'e gavit mui a beoc'h d'ho kalon inouet ha disec'het. Deuit da zaoulina dirak ann Tabernakl. Eno e kavoc'h ann eienen, a roio eur vuez nevez d'hoc'h ene. Eno, e kavoc'h Mestr ann oll vadou a ro bepred he c'houlou da gement hini herped gant feiz. Ia, hen lavaret a c'hellomp, ann disterra euz ar gristenien, ma ped gant humilite, a gav ehars ann Aoter, mil ha mil guech muioc'h a eurusdet eget ar pec'her e kreiz he oll blijadureziou direiz. Ia, ehars treid Jesus, a jom ehan e Sakramant Meulet ra vezo ann Aoter, e kavimp ar pare da oll glenvejou ann ene. Eno, dreist oll, e tiskuez he drugarez. Ann doare guella da c'hounit hegalon sakr, eo mont aliez d'hen adori. Mes sious ! hon labouriou a vir ouzomp,

da veza ganthan ken aliez ha ma karfemp. Evelato, ar pezh ne c'hellomp ket dreizomp hon unan, a c'hellomp da ober oc'h en em zikour an eil egile. En em gle-vomp eta, da zont peb-hini d'he dro da ober hon heur Adorasion ; hag evel-se, e vezo dalc'h-mad unan bennag o telc'he hor plaç dirak ann Tabernakl.

Oc'h en em glevet egisse da ober, a rumm-da-rumm, ann heur Adorasion, e vezo eb ehan kristenien kalounek, daoulinet dirak ann Aoter, o pedi evitho ho unan, hag evit ho breudeur. Eun doareze, peb hini ac'hanomp a c'hello lavaret da bep mare euz ann deiz : « N'hon ket, o va Jesus, evit mont breman d'hoc'h adori enn Tabernakl, mes eur joa vraz eo d'am c'halon sonjal n'oc'h ket dilezet, ez euz re all oc'h ober ho lez deoc'h, hag o pedi evidomp oll. »

Piou eta, hor breudeur ker, a c'helfe beza lezirek avoalc'h evit dilezel eunn dra ken kaer, ha ken talvouduz ! Pion ne ve ket eur joa vraz ganthan ober ar pezh o deuz great hon tudou koz ! Piou ne garfe ket kaout perzh enn emglev-ze etre

kristenien, a denno varnomp, ha var ann Eskopti a bez, ar grassou ar re vrassa hag ar re builla.

RAC-SE

Goude beza goulennet sklerijen digant Doue, ha kemeret ali hor breudeur ar Chaloniet euz a Iliz Kathedral Kemper, hor beuz gourc'hemennet hag e c'hourc'hemennomp ar pezh a zo ama varlec'h.

I.

Devosion Adorasion Perpetuel ar Sakramant Meulet ra vezo a zo savet a nevez enn hon Eskopti, hag a vezo heuliet ervez arreglamant hag ann taolennou a gassomp deoc'h assamblez gant ar gemennadurez-ma.

II.

Ann Adorasion a gommanso d'an deiz kenta a viz du 1835, dre barrezion Plabennec ha Pleyber-Krist.

III.

Evit ma c'hello ann oll gristenien e-nori, er memez dervez, ar c'hrass kaer o

deuz bet, da velet renevezi enn Eskopti eunn devosion ken talvouduz : evit ma c'hellint oll assamblez trugarekaat ann Aotrou Doue euz ar merk-ze a garantez en deuz ar vadelez da rei dezho; d'ann 18 a viz here, deiz gouel Belegiach Jesus-Krist, ar Sakramant e vezo expozet enn oll Illizou Parres, hag e chapelou ar gouentchoù, epad ann offern hag ar gousperou. Dious ar pardaès, goude ar venediksion, a vezo kanet ann-*Te Deum* gant ann orezon *pro gratiarum actione*.

Hag e vezo ar gemmennadurez-ma lennet enn oll Illizou euz hon Eskopti.

Roet e Kemper, ann eisved ar viz guengolo, da zeiz gouel Ginivelez ar Verc'hez Vari, 1835.

† J. M. DOMINIQUE,

Eskob a Kemper.

Dre ann Aotrou n'Eskop,

ALEXANDRE.

Belek-Sekretour.

Ervez ar Reglamant great neuze gant ann Aotrou n'Eskop de Poulpiquet, peb parrez euz ann Eskopti a dlle kaout ann Adorasion, peb hini d'he zro, epad ann niver derveziou merket var diou daolen. Da genta, tro peb parrez en em gave bep daou vloaz; da c'houde eo bet kresket ann niver euz ann deveziou Adorasion evit peb parrez ha tro peb hini n'en em gav mui nemet bep pevar bloaz.

Ar gemmennadurez-ze a ziskuez ervad pegen karet ha pegen talvouduz eo devosion ann Adorasion. Mez, evel m'hen lavar ann Eskop santel n'en deuz great nemet renevezi anezhi enn Eskopti. A bell-ze e oa bet savet. Enn hor bro zoken eo ganet ann devosion gaer-ze. Ha kement-se a zo eunn enor evidomp-ni, kristennien Eskopti Kemper.

Er bloas 1654, e do rener e skolach Kemper ann Tad Huby, euz a urz ann Tadou Jezusted. E kalon ar belek disparze, e teuas, da genta, ar zonz euz ann devosion-ma. Komz a reas euz ar zonz-ze d'ann Aotrou du Louet, a voa er mareze Eskop e Kemper, ha da eunn Tad

Capucin a brezege, er bloavez-se, ar c'horaïs enn Iliz Kathedral. Ann Aotrou n'Eskop a gavas mad ann dra-ze ; ha, gant he aotre, ann Tad Capucin a gomzas, er gador, euz ann devosion nevez Burzudus eo pegen buhan enem skignas enn Eskopti Kemper, e Breiz oll, e Franz, hag e pep korn euz ar bed. Daou vloas goude, e voa savet e Paris eunn urz leanezet, evit adori ar Sakramant Meulet ra vezo. « Ar merc'het santel-ma, ann eil goude eben, a veze noz deiz enn ho chapel dirak ann Tabernakl. Ho diviz oa : Ra vo Meulet e pep amzer ar Sakramant euz ann Aoter. » (M^{gr} Bouvier). Kals gouentcheou all a voa savet enn enor ann Adorasion. Mes, epad ar Revolusion vras int bet dismantret. Pa voa tremenet ar barr amzerze ha deuet ar peoc'h, var dro 1800, e voe savet adarre eunn urz a veleien a rer anezho *Beleien ar Zakramant*. Ann Tadou-ze, eo a laka ar parrezioù e *Breuriez ann Adorasion*, bep miz, (Adoration mensuelle), hag a ra dezho kaout perzer madou spirituel o deuz ho-unan.

Setu ama ar pezh zo red da ober evit

beza e breuriezann Adorasion. Mes n'euz pec'hed ebet o vankout d'ar pezh a zo merket izelloc'h. Eunn devosion eo epken.

Red eo 1^o lakaat ann hano var gahierou ar Vreuriez, Penn ar Vreuriez a zo e Paris. ⁽¹⁾

2^o Ober eunn heur Adorasion bep miz. Ar guella eo en em glevet, da gaout peb hini he heur merket. Da zul eo ann essa, evit ann dud divar ar meaz, ober ho heur Adorasion. Peb hini a gemer ar zulver er miz, hag ann heur a blij mui dezhan. ⁽²⁾

Setu aze ar pezh e renker da ober. Alia a rer ouspean-ze ar re a zo er Vreuriezma 1^o da gommunia eur vech, bep miz, evit trugarekaat hor Zalver J.-K. da veza chomet ganeomp var ann Aoter, hag evit

(1) An hanoioù a dle beza kaset da zekrétour ar Vreuriez:

Monsieur le marquis DE BELLOI, Secrétaire, Rue de Washington, 3, PARIS.

(2) Pa vez kals a dud e Breuriezann Adorasion, a c'heller kaout, gant aotre ann Aotrou n'Eskop, Exposition ar Zakramant, eur zulvez bep miz, azalek fin ann offeren-bred betek goude ar gousperou. (Exposition mensuelle).

hen digoll euz ann dismegansou a rear dezhan e Sakramant he Garantez ; — 2^o de lavaret bemdez eur *Bater* hag eunn *Ave Maria* evit a re a zo er Vreuriez, hag ivez ann diou beden verr-ma, a amzer da amzer epad an deiz : « Meulet, karet, hag adoret ra vezo Jesus er Zakramant euz ann Aoter, da james. » (100 devez indulj.) — « Benniget ra vezo ar Gonception santel, dinam, ha pur meurbed euzar Verc'hez Glorius Vari, Mam Doue » (300 devez indulj.)



Induljansou da c'hounit.

Ervez eul lizer skrivet gant hon Tad santel ar Pab, Pie IX, d'ann 20^a viz kerzu 1858 ha kavet mad gand hon Tad santel ar Pab, Leon XIII, da viz du 1880, ar re a zo e Breuriez ann Adorasion bep miz, a c'hell gounit ann induljansou a zo ama varlec'h :

1^o *Induljansou leun.* — Da genta, ann dervez ma lakeont ho hano, da c'houel ar Rouanez ha da c'houel ar Zakramant ; nemet e raint eur visit d'ann Iliz parrez o pedi enn intansion hon Tad santel ar Pab, goude beza kovesseat ha kommunit. — D'an eil, eur vech bemdez, ma reont eunn heur Adorasion, goude beza kovesseat ha kommunit. — (Ann dud, boas da govez bep eiz dervez pe bep pemzek dervez, a c'hell gounit ann induljans leun, nemet e raint er memez dervez a Gommunion hag eunn heur

Adorasion.) — D'an trede, en heur ar maro, o lavaret ann hano santel a Jesus.

2^o *Indulgans seiz vloas ha seiz korais*, bep tro ma raint eunn heur Adorasion, goude beza goulennet pardon euz ho fec'hejou.

Ann oll induljansou-ze a c'heller da c'hounit evit anaoun ar purkator.

Teir offern a vez lavaret bep bloas, e mare gouel ann oll Zent evit a re euz ar vreuriezh a vezo eat da anaoun, nemet e vezo kaset ho hanoiou da zekretour ar vreuriezh.

NOTA. — Ar pennad skrid a zo amañ varlec'h, a vezo bet great, evit ma vezo essoc'h tremen ervad ann heur adorasion. Neb a ve guelloc'h ganthan a c'hell lenn levrioù all. Mes ar re, ne c'houzont ket lenn, a lavaro ho Rosera pe pedennou-all, o lakaat o speret da zonzal, e maint dirak hor Zalver Jesus-Krist, hon Roue hag hon Doue.

Mevelien ann diaoul a ra goassa ma c'hellont evit hor pellaat diouz hor Zalver benniget. C'hoant o deffe zoken, ne anavesfemp ket anezhan. Ha goulskoude ne gavimp nemet ennhan hag enn Iliz katholik ann hent, ar virionezh hag a vuez. Ra vezo Doue ann Tabernakl hon Roue da viken. *Adveniat Regnum tuum.*






Église catholique
en Finistère

Document numérisé en 2021

EUNN HEUR ADORASION



EUNN HEUR ADORASION



O va Zalver Jesus, setu me daoulinet dirazoc'h. Roet emeuz va ger, e rinn hep miz eunn heur Adorasion dirak ho Sakramant, Meulet-ra vezo. Ober a rinn guella ma c'hellinn ar pezh emeuz lavarret. Rak pa zonzjann em beuz tremenet, nag a amzer gollet da zul, d'an dervez benniget-ze, hag em bije gellet implij enn eunn doare talvoudussoc'h evit va ene ! Nag a bennad amzer eat e-biou, o komz divar ben traou netra, pe o c'hoari ! Mad eo dinn en em ziskuiza. Mes va ene koulz ha va c'horf e deuz ezom da ziskuiza ha d'en em grenvât, e pelec'h e kavinn-me, d'am ene, diskuiz ha nerz, guelloc'h eget ehars treid ho Tabernakl,

el leac'h ma chomit kuzet noz deiz dindan ar spesou sakr, dre garantez evidomp ?

Enn Iliz-ma, n'e maoun ken, evel pa lavarsen, dindan ann amzer fall. Dilezel a rinn breman ar sonj euz va labouriou, euz afferiou ar bed, evit lakaat va speret da sonjal enn ho madelezou, o va Jesus, hag e traou ann env. Var an douar-ma, peb tra a dremen enn dro dinn. Ho komzou santel hag ar pezh a zell ouz va silvidigez en dremenint ket. Guirionezou ar feiz a ra vad d'am ene. Bez ' int evithi, evel eunn ezen a deuffe euz ann Envou. Diskleriet hoc'h euz guechall hoc'h unan d'ann drouk-speret, pa deuas d'ho tenti enn desert : « Ann den ne vez ket ebken gant bara ; komzou Doue a zo ivezeur vagadurez, hag a zored dezhandagaout. » — Ouspense, e ty va zad emañ, e ty va guella mignon, e templ va Doue : al labous a gav guasked ha goudor dindan diouaskel e vam. Aman, en em gavan tost deoc'h, o va Zalver. Pell emañ dioc'h ann trous. Essoc'h aze e vezo d'am speret ha d'am c'halon trei

varzu ennoc'h, evit hoc'h adori, evit ho trugarekaat, evit goulenn diganeoc'h ar grassou em euz ezom, ha pardon evit va fec'hejou. Euruz e venn, ma c'helfen ho tigoll, ervez va galloud, euz ann ingrat, euz ar ienien, em euz bet re aliez siouas enn ho kenver, hag ivez euz ann dismegans, a rear deoc'h, o va Jesus, e Sakramant ann Aoter !

E kompagnunez vad en em gavinn, epad ma vezinn oc'h ober va heur Adorasion, e kompagnunez ann Elez, digasset euz ann Env, da ober ho lez deoc'h-c'hui, ho Mestr hag ho c'hrouer. Ne velann ket, gant va daoulagad, ar sperejou kaer-ze ; mes petra bennag ma ne velann ket anezho gant daoulagad ar c'horf, va speret, sklerijennet gantar feiz a voar ervad, emaint aze bodet ha stouet enn dro deoc'h, c'hui ann eil Ferson euz ann Dreindet sakr, en em c'hreat d'en ha cho-met enn hon touez kuzet enn eur mod burzudus er Sakramant Meulet ra vezo. Ho meuli a reont enn ho gis, hag hoc'h adori, evel Elez all ho meul hag hoc'h ador gant ar Zent e palez ann Envou.

Evidhon-me, ma ne c'hellan ket beza ken tost deoc'h, o va Jesus, chom a rinn aman dirag dirag dor ho Tabernakl.

Rouaned ann douar a vez, noz-deiz soudardet o tiouall dor ho falez, hag o renta dezo enor. Ma rer kement a zigorieu da brinsed ar bed, ha neo ket a zoare deomp-ni, kristennien, ho pugale muia karet, dont peb hini d'he dro d'hoc'h enori ivez, c'hui Roue ann Env hag ann douar. Abalamour deomp eo e chomit e Sakramant ann Aoter enn eur stad ken dister; hag e vijen dianaoudek evit ken braz madelez! Nann. «Ho rouantelez deuet deomp.» Me a fell dinn hoc'h anaout evit va roue ha va mestr kenta. Ar zoudard, lakeat e tal dor ar pennou braz euz ar vro, a vez marteze eno enn despet dezan. Hir e kav ann amzer. Mes me a deuiio, bep miz, a volentez vad, e tal dor ho Tabernakl. Gant joa e tremenninn va heur ouz hoc'h adori, ouz ho trugarekaat, ouz ho pedi. Va dever eo evel kristen; ha va interest eo ivez e peb giz. Ar re a vez tosta d'ann heol a bak muia e domder. Ar re a vez tosta d'ar

rouaned, hag aketussa var ho zro, o deus brassa perz enn ho mad-oberou. Dre-ze va Feiz, va Esperans, va C'harantez evidoc'h ne rint nemet kreski ha startaat. An traou a iello guelloc'h ganen en dro. Muioe'h a gourach em bezo da labourat, muioe'h a batiantet da c'houzanv gant va zud. Revenezi a rinn egisse ar santi-manchou mad a zo em c'halon. Trugarez deoc'h, o va Jesus. Ne vanko dinn-me, nag ar sklerijen, nag ann nerz, a zo red da gaout enn draonien-ma a zaelou evit beza treac'h d'ann drouk, hag evit beva bepred enn ho toujanz. Hen esperout a rann gant sikour ho krass, o va Zalver, ha dre intercession ar Verchez Glorius Vari. Abalamour da-ze, e zann da lavaret eunn dizenez eur ar chapeled.

AKT A ADORASION

Hoc'h adori, o va Jesus, eo renta deoc'h ann enor, ar respet, ar zentidigez dleet d'hor C'hrouer, d'hor Zalver, d'hon Doue. Plega a rann deoc'h e peb tra a speret hag a galon. Her gouzout a rann, ervez ma lenner enn Aviel, guechall ar Yuzevien, tud a neubent a feiz, gounezet gant ho santimant ho-unan, a droas kein deoc'h eunn dervez, hag ho tilezas. Ann deiz araok koulskoude, ar memez re o doa klasket lakaat ac'hanoc'h da Roue. Great ho poa dirag ho daoulagat meur a vuzud, unan dreist oll. Gant pemp torz bara ho daou besk, ho poa roet da zibri leiz ho c'hof da bemp mil bennag, deuet d'hoc'h heul. Klevet a rejond ac'hanoc'h o prometti rei ho korf da zibri, hag ho koad da eva, evit maga ene ann den, ha kendelc'her enn hi ar vuez a bad da viken, talvezet deomp dre ho maro var ar groas. «Setu aze traou tenn da glevet,

eme ar Yuzevien, piou a c'hell kredi kement-all ? » ha meur a hini, eme ann Aviel, a ieas kuit. Me voar ervad, o va Jesus, e koustas d'ho kalon ken tener a Zalver, guelet ann dud ingrat-ze, ha poud da kredi, o tec'het kuit diouzoc'h. Mes neuz forz pegement en deuz koustet deoc'h, n'hoc'h euz ket laoskeat ho komzou. Kendelc'her hoc'h euz great da brezeg, oa red kredi ar pezh o poa dija disklariet divar benn Sakramant Adorabl ann Aoter, ha d'ar fin e c'houlenjac'h digant hoc'h Ebstel ha digant ar re all, chomet stard enn ho feiz : « Ha c'hui, c'hoant ho peuz ivez da vont kuit ? » — Per, ar c'henta anezho, a respountas raktal evitho oll : « Mestr, da gaout piou ez affemp-ni ? ho komzou a rô ar vuez a bado da viken. Evidomp-ni a gred hag a anavez ervad eo c'hui ar C'hrist, hag e zoc'h e guirionez Mab da Zoue. » Da heul sant Per, daoulinet dirag ho Tabernakl e lavarinn deoc'h ivez, o va Jesus, da gaout piou ez affen-me ? ho komzou a rô ar vuez a bado da viken. Kredi a rann stard emaoch e guirionez er Zakramant

Meulet ra vezo ann Aoter, korf, goad, ene ha divinite. Petra ra-ze dinn-me guelet epken doareou ken dister. Ma vije deuet eunn den da lavaret kement all dinn, n'em bije birviken her c'hredet ; mes ne ket eunn den, c'hui hoc'h unan, c'hui ar virionez memes, ho c'heuz hen lavaret. Ne c'hellit na fazia hoc'h unan, na lakaat den da fazia.

Breman ezeuz trivarc'h kant vloas, derc'hent ho maro, edoc'h oc'h ober ar goan diveza gant hoc'h Ebestel. Kemer a rejot etre ho taouarn ar bara a ioa var ann daol ; hag o veza savet ho taoulagat etrezek ann Env, evit ober eur beden d'ho Tad, ho c'heuz benniget ar bara-ze ; ha goude beza great tammou anezhan, ho c'heuz hen roet da zibri d'hoc'h Ebestel, eun'heur lavaret dezho : « kemerit ha debrit euz ann dra-ma oll, rag ann drama eo va c'horf, a vezo lakeat d'ar maro evidoc'h » « *hoc est corpus meum, quod pro vobis tradetur.* » Ervez ar c'homzou-ze, tennet euz ann Aviel, e velann ervad, o va Jesus, ne c'halvit mui bara ar pez a roit da zibri d'hoc'h Ebestel. Ma chom

c'hoas var ar pez hoc'h euz etre ho taouarn doareou ar bara, chenchet eo ar substans, da lavaret eo an danvez euz ar bara, enn ho korf hag enn ho koad sakr, dre ann nerz euz ho komz oll c'halloudek. Rag, en eur ginnig d'hoc'h Ebestel ar pez oc'h euz etre ho taouarn, e lavarit : « *hoc — an dra-ma* eo va c'horf a vezo lakeat d'ar maro evidoc'h. »

Neo ket evit eur vech ebken, hoc'h euz great ar burzud-ze, ar brassa euz hoc'h oll burzudou. Padout a reio da viken pe guir e roit d'hoc'h ebestel, ha dreze d'ann oll veleien, a deuio var ho lerc'h ar c'halloud da ober kement all, ervez verk sklear ho komzou santel : « Grit ann dra-ma, eme c'hui, da zalc'her sonj ac'hanon. » « *Hoc facite in meam commemorationem.* »

Instituet oa ganeoc'h, o va Jesus, ar Zakramant Meulet ra vezo euz ann Aoter. Adalek ar moment benniget-ze, e kement leac'h, ma'zeuz eur beleg da lavaret ann Offern Zantel, e tiskennit bemdez var ann Aoter, hag e chomit aze enn Tabernakl, noz deiz, ganeomp, kuzet

dindan ar spesou sakr. — Hen anzañ a rann, eur myster eo evidhon. Ne gomprenann ket penaos emao'h, hag e chomit dindan ar spesou sakr. N'ounn ket souezet evelato. Va speret var ann douar-ma a zo ken dister ! Eunn nebeudik a nerz en deus, evel va c'horf. Petra bennag ma en deuz heman eunn tam nerz, ne c'hellann ket klask samma, var va skoas, eur garrek vraz. Kement-se a vije diskiant euz va fers. Biken ne c'helfen-me dont abenn d'hen ober. Flastret a ven dindan ar pouez. Sot e ven goulskoude, ma teuffen da nac'h czeuz eur roc'h dirazhon, abalamour ne c'hellann ket dibrada anezhi. Perag neuze ' ta, mont ivez da glask kompren traou a zo dreist galloud Speret er bed-ma ?

Ia, kredi a rann, hag anaout a rann ervad, o va Jesus, emao'h aze enn Tabernakl e guirionez korf, goad, ene, divinite, c'hui Mab Doue kuzet dindan spesou ar bara er Sakramant Meulet ra vezo. Ma teuffec'h zoken, dre eur burzud, d'en em ziskuez var ann Aoter, evel enn amzer sant Loiz, roue Frans, evoac'h en

em ziskuezed epad ann Offerenn enn Hosti sakr dindan furm eur c'hrouadur ar c'haerra, lavaret a raffen da heul ar roue santel, pedet da vont da velet : «Nep piou bennag, ne gred ket avoalc'h e ve hor Zalver Jesus Krist e Sakramant ann Aoter, a c'hell mont da velet ar burzud. Evidhon-me, eme sant Loiz, a zo surroc'h a gement-se, eget m'her guelfen gant va daoulagat, pe guir eo Doue, he unan, eo hen lavar dinn. »

Ma vijac'h en em ziskuezet e kreiz ho klear gant hoc'h oll galloud, piou en devije kredet tostaat ouzoc'h, o va Jesus ? Sklerijen ann heol n'eo nemet eur skeud, hag c'hoas eur skeud n'eo ket da lakaat e skoas ho klear ; ha pa zelann ouz ann heol eunn nebeudik amzer, va daoulagat a zo raktal trellet. Re skedus eo he sklerijen evitho. Penaos em ije me gallet gouzanv ar sklerder euz ho klear ? Nag a vadelez ho c'heuz bet evidomp !

Mes boaz avoalac'h oun da velet ac'hanoc'h kuzet dindan doareou dister. Pa hoc'h en em c'hreat den evit va savetei, hoc'h en em lakaat, eme ann abostol sant

Paol, koulz lavaret da netra « *exinanivit semetipsum.* » C'hui, Mestr ann Env hag ann douar, kemeret oc'h euz doare ar pec'her. « N'ho pezet aoun ebet, eme ann Eal da bastoret Bethlehem, da nos Nedelek ; rag, dont a rann da zigas deoc'h eur c'helou a joa : ganet ezeuz evidoc'h hirio eur Zalver, e kear David ; ha setu ama penaoz ec'h anavezoc'h anezhan : kaout a reoc'h eur bugel mailluret ha gourvezet enn heur c'hraou. » Kerkent, eme ann Aviel, eur maread Elez all a unissas ho moueziou gant hini ann Ealma evit meuli Doue, enn heur lavaret : « Gloar da Zoue e barr ann Envou, ha peoc'h var ann douar d'ann dud a volontez vad. » Pa oue eat ann Elez kuit, ar bastoret a redas varzu kraou Bethlehem, prez varnezh. Kaout a rejont ac'hanoc'h, o va Jesus, ervez ar peza voa bet annonet dezho gant ann Eal, krouadurik paour, mailluret ha gourvezet var eunn tam kolo. Eur stad ken dister, ken humbl a voa travoalac'h evit lakaat tud troet gant ar fougerez gant enoriou ar bed, dallet gant ar voged-ze a ia da netra,

da gaout evidoc'h neuze nemet dispri-jans. Ar bastoret hi, izel a galon, n'int ket aheurtet dirag doareou ken paour, ken dister. Pell diouz eno. Hi ivez n'ho devoa evit ty nemet eur lochennik, hag evit guele nemet eunn tam kolo. O velet eunn henvelep tra, kalonou ann dud keiz-ze a zrid gant ar joa. Kredi a rejont, hag en em daola a rejont d'ann douar, ha stouet ho fenn, hoc'h adori a rejont, o va Jesus. Hoc'h anaout a rejont, evel ho Salver hag ho Doue, kuzet dindan doare eur c'hrouadurik paour. Var lerc'h ar bastoret e teuas rouaned, deut euz tu ar sao heol. Ho kavet o deuz er memez kraou, ha petra bennag ma voa ann tri rouema pinvidik, galloudus ervez ar bed ha desket bras, n'o deuz ket bet a vez oc'h en em strinka d'ann douar dirazoc'h evit oc'h adori. Kinnig a rejont deoc'h ann traou a briz, a ioa deuet gantho eaz ho bro ; hag ann traou a briz-ze a ioa aour, ezans ha mirrh, eme an Aviel. Dreze, e tiskuezent e c'hana-vezent ac'hanoc'h evit ho Roue, ho Doue hag ho Zalver.

Ma voa dister ho toare e kraou Beth-lehem, o va Jesus, disterroc'h eo c'hoas epad ho passion ha var ar C'halvar. Evel bressed hoc'h dindan treid tud fallakr ha dinatur. Liammet ho taouarn deoc'h, stlejet euz eur varnedigez d'eben ; peb seurt farzerez iud hag euzus a zo great divar ho kroust. Piou en deffe lavaret, e velet eunn doare ken truezus, e voac'h ann oll c'halloudek, Mab Doue ? — Mervel a rit, stag ouz ar groas, e kreiz ann tourmanchou ar re skrijussa, c'hui Mestr var ar vuez ha var ar maro ! Mez ivez, a veac'h ma o poa rentet hoc'h huanad diveza, ann douar a grenas, ar beziou a zigoraz, — Ann offiser hag ar soudardet, a ioa var menez Kalvar, a oue spontet honnan, he ne ouent ket evit miret da lavaret : « E guirionez, ann den-ze a ioa Mab da Zoue. »

O va Jesus, pa sonjann enn ho passion, ann daelou a deu em daoulagad, koeza a rann d'ann daoulin, ehars treid ho kroas benniget ; hag ar c'blac'har em c'halon, e c'houlennan diganeoc'h pardonn euz va fec'hejou : hi, hag hi epken, a

zo bet penn kaos euz kement a boaniou, euz eur maro ken kris ! Ia hoc'h anaout a rann evit va Zalver trugarezus. Prenet hoc'h euz ac'hanon gant ho koad sakr. Na pegen ker eo koustet deoc'h va ene !

Petra oun-me e skoas deoc'h, o va Jesus ? C'hui eo ann oll c'halloudek ; gant eur gomz hoc'h euz krouet ar bed oll hag ann traou kaer a zo ennhan, ann heol, ar stered, ann oabl, ar mor, ann douar, « *Dixite et facta sunt, mandavit, et creata sunt.* » Pa zellann ouz bolz ann Env, kelen a ra ac'hanon, ha lavaret a ra dinn pegen bras eo ho kloar, pegen dudioz eo al labour euz ho taouarn. Goude beza krouet an traou-ze oll, kendelc'her a rit anezho dre nerz oll c'halloudek ho Providans. Ar poueziou a laka eunn horolach da vont enn dro. Ma ne vez ket savet ar poueziou-ze, ann horolach a jom a za ; neuz mui a nerz, a vuez ennhñ Ar poueziou evit ar bed oll, hag a laka ann heol, ar stered, ar mor da vont enn dro, eo hoc'h oll galloud, ho madelez eb muzul. Ma teuffe deoc'h en em denna, o va Doue, ann traou-ze oll a

jomfe a za, hag ar bed a iasse da goll. Mervel a raffemp var ann taol. Beuzet omp enn ho kalloud hag enn ho madelez, evel ar pesk er mor. « *In eo vivimus, movemur et sumus.* » Ia c'hui eo, o va Jesus, Roue ann Env hag ann douar. Ha petra oun-me nemet labour ho taouarn, ha c'hoas eul labour euz ar re zisterra. E kreis ann oll grouardurien a zo er bed-ma n'oun nemet, evel pa lavarfen, eur c'houanennick etouez ann treaz, a gaver var oajou ar mor bras; ha goulskoude, ann oll boblou enn ho fez a zo dirazoc'h evel pa ne vent ket! Petra oun-me' ta neuze, e skoas deoc'h, o va Jesus, nemet poultr ha ludu? « *Cum sim pulvis et cinis.* » — C'hui eo ar furnez memez; ha me' zo eur speret leun a denvalijen, buhan dallet gant ann orgouil hag ann ioulou fall! — C'hui eo ar zantelez, o va Zalver! N'hoc'h ket evit gouzanv ann disterra tach enn Elez zoken; hag e c'houzanvit ac'hanon dirazoc'h! « A veac'h great den, ha pa voa c'hoas va mam ouz va dougen, evoann pec'her; » hag abaoue neuze, pet guech ne meuz-me ket torret ho

lezen zantel? n'oun nemet eur pec'her, eur bec'herez paour! Ann Elez, evitho da veza purroc'h eget ann heol, a gren dirazoc'h, hag a guz ho bizach gant respet; ha me, kaillaret ma zeo va ene gant kant ha kant pec'het, en em zalc'h enn ho prezans, eb aoun ha dibarfet! Ne c'hellann ket chom eunn nebeut amzer daoulinet, enn Adorasion, eb ma iasse va speret da c'haloupat du-man du-hont; ken skanv oun a benn!

Her santout a rann, goude lakaat zoken va guella bolontez, ne c'hellinn morse rei deoc'h ann enor, a zo dleet! Mes evel ar roue David, e lavarinn d'ann oll draou krouet dont d'am zikour. « *Benedicite omnia opera Domini Domino.* » Ra zeuio fleur ar jardinou, gouez ar c'hoajou, eost ar parkeier, ra zeuio ar pesket zo er mor, al labouset zo enn ear, ann anevaled zo var ann douar, ra zeuint oll, pebhini enn he c'hiz, da veuli ho Doue zo var ann Aoter; ra zeui ann oll gristenien zo er bed gant ann oll Zent hag ann oll Sentezet gant oll Elez ar Baradoz, ra zeuit oll d'am zikour da renta deoc'h,

o va Zalver Jesus, meuleudi hag enor.
Dreist oll pedi a rinn ar Verc'hez Glorius
Vari da skoazella he c'hrouadur paour,
evit kinnig deoc'h va spered, va c'halon,
va skianchou, kement a zo ac'hanon, evit
hoc'h adori, ervez va galloud. Evit-se e
zann breman da lavaret diou dizenez euz
ar chapeled.



ACT A DRUGAREZ

Gonde beza hoc'h adoret, o va Zalver
Jesus, eo red dinn ho trugarekaat euz
hoc'h holl madoberou: d'am beza krouet
ha kendalchet e buez betek vremen,
d'am beza prenet gant ho coad, santifiet
dre ho Sakramanchou, maget ken aliez
a vech gant ho Korf sakr. Ia chom a rit
noz deiz enn Tabernakl kuzet, dindan
spesou ar bara, enn eur stad ken dister,
evit rei dinn nerz ha confort e kreiz va
ankeniou ha va foanious. Var ann Aoter,
evel guechall var menez Kalvar, e pedit
noz deiz ho Tad da gaout truez ouzomp;
miret a rit dre-ze, ma teuffe breac'h
justis Doue da goueza varnomp! Penaos
e c'hellin-me ho trugarekaat evit ke-
ment a vad-oberou.

Kaer emeuz sellet, ne velann ha ne
gavann a bep tu nemet merkou euz ho
karantez em c'henver! Petra' meuz, ha

n'em beffe ket resevet digant ho madelez, o va Jesus ? Paour noas oun ! N'emeuz netra dreizhon va unan ! Ne vevann nemet divar goust ann aluzennou, a ro dinn bemdez ho torn trugarezus ! Petra deuffen da veza, ma ne vije ket ho Providans holl c'halloudek o lakaat traou ar bed-ma da vont enn dro ? Mervel a raffen gant ann naoun ! Koueza a raffen e poultr hag e ludu ! Roet oc'heuz dinn ar vuez, ha kendelc'her a rit anezhi dinn. Gant ar vuez, hoc'h euz lakeat, em c'hreiz, eur speret evit hoc'h anaout, eur galon evit ho karet. Ar c'horf emeuz a zo, evel eunn ty savet da rei lojeiz d'am ene, epad eunn nebeut bloaveziou. Ar c'horf-ze, en deuz skianchou mad d'ho meuli ha d'ho servicha. Krouet oun bet ganeoc'h evit ho kloar, hag implij vad a dlean da ober euz ar madou-ze, hoc'h euz fiziet ennhon. Va c'houstians ken lavar dinn : bez ezeo evidhon, evel ann encleo euz ho mouez, va Doue ha va Mestr ? Ma emeuz ar guall heur da ober ann disterra drouk ; raktal, e santann va c'halon, evel bec'hiet gant eur zamm pounner ! Ma' zeo eunn dra

grevus, oun goasket, noz deiz gant ann ankeniou. Va ene e deuz kollet ar joa hag ar peoc'h ! Kement-se a verk selear ar guir hoc'h euz varnhon, bag ivez ann interest, hoc'h euz bepret douget d'ho pугale. Aoun hoc'h euz, e teuffent da fazia gant ho hent, ha d'en em goll.

Grassou kaerreoc'h c'hoas o poa roet d'hon tad kenta, o va Zalver Jesus ! Speret Adam a voa digor ha lemm : he galon iac'h a voa troet varzu ar mad ; he gorf a jome sentus ouz ann ene. Sklerijennet evel ma voa ganeoc'h, lakaat a re he oll blijadur ouz hoc'h adori, ouz ho trugarekaat, hag al labour a voa eunn diskuiz evinthan. Great o poa dezhan eur jardin, ha ne c'houffet biken guelet kaerroc'h eget-hi ! Eno, ez oa guez karget a frouez euz ar re vella a ouffe da danva. Frouez guezen ar vuez a dlle zoken miret ouz Adam da glenvel ha da vervel. Eurur evoa e Barados ann douar, euz eunn eurusdet eb he far. Setu ar vadelez hoc'h euz bet evit ann den, er penn kenta euz ar bed. Ar pezh hoc'h euz great evit Adam, ho p'oa great evidhon ;

rag, me a dlle herita d'ar madou-ze, evel eur c'hrouadur a deu da herita da zavez he dad !

Evit kement a vadelez, ne resevit, o va Doue, nemet ingratiri aberz Adam, ho krouadur muia karet. En em zével a re siouas ! enn hoc'h eneb ! Credi a ra buhan komzou flour ha disleal ann drouk-speret, hoc'h enebour touet, ha jalous euz eurusdet ann den. Enn despet d'ho cour-drousou ; Adam a deu da zibri euz frouez ar vezen Anaoudegez ann drouk hag ar mad. Hen diffennet o poa outhan goulskoude, dindan boan da goll he eurusdet, he vuez zoken. « Ma tebrit euz frouez ar vezen-ze, hoc'h sur da vervel. » Adam, touellet gant promessaou kaer ar zarpant, a zientas. Neuze, siouas ! ann traou a jenchas tu, evit ann den paour. Ann denvalijen a deuas enn he speret, ann ankeniou hag ann drougiez a vec'hias he galon. Ioulou fall ar c'horf a glaskas, a bep mare, moug a santimanchou mad ann ene. Ann den reuzeudik a zo dinerzet, e peb giz, ha dismantret dre ar pec'het ; ha c'hoas, goude eur vuez c'huéro ha

poanuis var ann douar-ma, n'en devoa mui da c'hedal nemet tourmanchou scrijus ann Ifern ! Tennet en devoa varnezhan ho mallos, o va Doue : hag, eur vech kouezet er pec'het, ann den ne voa ket goestl, anezhan he unan, da zével enn he zav. Meritout ar pardon a zo enn tu all d'he c'halloud. Re vras offans a ra ar pec'het marvel da Zoue, ho tad !

C'hui eo, o va Jesus, c'hui eil Ferson ann Dreindet Sakr, eo hoc'h euz taolet varnomp oll, bugale da Adam pec'her, eur zell a druez hag a drugarez. Lavaret hoc'h euz da Zoue, ho Tad : « Va Zad, neket falvezet deoc'h digemer ann ofransou, nag ar sakrifisou, kiniget deoc'h ; gant ann den pec'her. Ne blijont ket deoc'h re zister-int. N'int ket goestl, anezho ho unan, da rapari ar gaou, great d'ho Majeste dre zizentidigez ann den kenta. Re vras eo ann offans, ha re vihan ann digoll. Mad, setu Me, ho Mab, Doue eveldeoc'h, prest da rapari ar pec'het, ha da ober ho polontez. » Dreze, o va Jesus, e kemerec'h varnoc'h hoc'h unan ar mallos kouezet, varnomp oll. — Doue,

ho Tad, enn he vadelez eb muzul, en deuz assantet ganeoc'h; silaouet en deuz ho koulén, hag ho tigasset en deuz, c'hui he Vab unig, var ann douar, enn draonien-ma a zaelou, da savetei ar bed. Eunn den, kouezet er mor dounn o vont d'en em veuzi, ne voar ket penaos trugarekaat avoualc'h ann hini en deuz bet ann nerz kalon da lammet enn dour, evit en tenna er meaz, ha savetei dezan he vuez. Koulsgoude, petra eo buez ann douar-ma, e skoas, ar vuez all ? C'hui eo, o va Jesus, hoc'h euz savetet ac'hanomp. Trugarez deoc'h.

Dare oamp eta da goll hon ene da viken. N'hon doa mui esperans da gaout ar pardon, na d'en em savetei. Diskennet hoc'h euz ann Env; kemeret hoc'h euz ar barfeta euz ann oll grouadurien, ar Ver-c'hez Glorius Vari, evit ho Mam. « C'hui, ar Verb, so en em c'hreat Den. » « *Et verbum caro factum est.* » Tremenet o peuz tri bloas ha tregont etouez ann dud. Ho c'helennet o peuz, diskuezet o peuz dezho ar guir hent; rak faziet e voant a bell-zo, roet o peuz, deomp, epad ann

amzer-ze, peb skouer vad; hor zikouret o peuz e peb gis. O madelez trugarezus ! Mestr ann Env hag ann douar en devoa doare ar pec'her ! Sant Yan Vadezour, o velet ac'hanoc'h o tont varzu ennhan, a lavaras guechall d'ar Yusevien, bodet enn dro dezhan : Setu aze Oan Doue, a lam pec'hejou ar bed ! » *Ecce agnus Dei qui tollis peccata mundi.* »

Na pegen ker e bet koustet deoc'h lamet pec'hejou ar bed ? eur veraden euz ho Koad ken talvoudek, eunn huanad euz ho kalon ken karantezus a vije bet traoalc'h, evit paea da justis Doue, ho Tad, ann dle, great ganeomp dre ar pec'het ! Oan Doue, gouzanv a rit ar maro, a denne, varnoc'h, muioc'h a vez hag a boan. Mervel var ar groas a voa, enn amzer-ze, maro ar sklavet, ar vuntre-rien. Seul vui a boan a gemerit evidomp, seul vui a garantez a ziskuezit deomp ! Nag a c'hraou presius ha puill en deuz talvezet deomp ho maro ! Nag a vadou a zo kouezet, euz ho kalon sakr, toullet gant kleze ar zoudard, var benn he pugale ! Sant Augustin, o sonjal e ta

voudegez ho maro, en em laouenne euz pec'het hon tad kenta, hag a lavare, e kreis e joa : « O pec'het eurus, en deuz great deomp kaout eunn henvelep Salver ! » « Ma voa bras, ar pec'het, eme sant Paol, brassoc'h eo bet c'hoas grass va Zalver. »

Gant ho krass, talvezet deomp oll dre ho maro, var menes Kalvar, ha resevet ganinn, evit ar vech kenta, e dervez benniget va badisiant, va ene paour, a ziagent dign euz ho kassoni, ha n'e doa ket da esperout antreal enn ho Parados, serret evithan dre ar pec'het orijinel, va ene a zo bet savet da eur renk ken huel, ma emeuz breman evel perz enn ho natur a Zoue, va Jesus. « *Divinae consortes naturæ.* » Kent-se, n'eo ket ann hano ebken da veza ho mab emeuz, mes bez e zoun, e guirionez, ho krouadur muia karet. Rag, ho Koad a zo, evel pa lavarfen, mesket dre ar c'hraas gant va hini. O kaerra tra, hag a ankounac'hean re aliez, siouas dinn ! Euz vouen ann Aotrou Doue ounn, evel kristen ! Goad va Zalver a red em goaziet. Doue neket mui ebken va C'hrouer, mes va Zad ! Na pegen guir

int eta ar c'homzou kenta, a gavann er Bater ! « Hon tad pehini a zo enn Env. » « *Pater noster, qui es in Cælis.* » Evit mam, emeuz ann Iliz santel Katholic ; evit breudeur ha c'hoarezet, ann oll dud fidel, ar zent hag ar zentezet er Barados ! Ha c'hui eo, o va Jesus, hoc'h euz talvezet dinn kement a c'hraasou ! Penaos eta ho trugarekain-me avoalc'h ?

Ganet ounn dindan galloud ann drouk-speret. Gant ann oad, n'emoa da c'hortos nemet guelet ann denvalijen o kreski em speret, ann tec'h d'ann drouk o krenvaat em bolontez. Pa neffe ann drugarez hoc'h euz bet evidhon, o va Jesus, treuzet emije ar vuez-ma, eb kaout ann hent mad ; sur e oan da fazia : ha goude buez c'huêro ha reuzeudik ar pec'her var ann douar, n'emoa da c'hedal, da-viken nemet poaniou scrijus ann ifern ! Henvel e voan ouz eur vezen avalou egras. Ar vezen-m'a dreizhi he unan, ne ro nemet koz frouez, ha traou c'huêro. Greffi a c'heller varnezhi, hag eur vech greffet, e teu ennnhi eur vuez nevez. Kutill a reomp, var he scourrou, ar frouez ar re gaerra, hag ar re

zoussa da danva. Araok va badiziant, evoan, o va Zalver, ar vezen avalou egras-ze. Gant ar vadiziant, emeuz resevet eur c'hinivelez nevez. Eur vuez all a zo denet em ene, hag ar vuez all-ze eo ar vuez kristen. Marteze gant ar pec'het orijinel var va ene, emije great eunn dra bennag a vad; mes nebeut: ha c'hoas, ann nebeut-ze ne vije ket bet talvoudek evit va silvidigez. Rag, sklear eo ho komzon, enn Aviel: « Eb va grass, ne c'hellit netra. » « *Sine me nihil potestis facere.* » Sakramant ar vadiziant e deuz lakeat, em ene, ar feiz, ann esperans hag ar garantez. Evel hadet eo bet ar vertuziou-ze, em ene; ha var ann had-ze, e tivoan peb seurt oberou santel, talvoudek dinn evit ar vuez all. Ia, va ene a zo bet, evel pa lavarfen, greffet varnoc'h, o va Zalver Jesus, dre Sakramant ar Vadiziant. Abalamour d'ho karantez, penn kaoz euz ho maro var ar groas, bez' emeuz ar vuez, ar vuez kristen.

Evit kendelc'her, em ene, ar vuez kristen-ze, resevet ganinn, devez va badiziant, petra na rit-hu ket? Kaout a rit

ann tu, d'en em rei dinn dindan spesou ar bara! Dont a rit da vaga ar vuez kristen ennhon gant ho Korf, ho Koad, hoc'h Ene hag ho Tivinite! Chom a rann sebezet dirag eur garantez ken bras! Ann Elez hag ar Zent a zo, ho unan, mantret dirag eur merk ken burzuduz euz ho madelez evidomp. Sakramant ann Aoter eo ar brassa burzud a garantez, hoc'h euz great biskoas. « C'hui, Mab Doue, eat hoc'h keit ha ma c'hellec'h mont eme Sant Yan. » « *Usque in finem dilexit eos.* » Pegen pinvidic bennag hoc'h, emesant Augustin, n'hoc'h euz netra, hag en deffe muioc'h a dalvoudegez eget ar Zakramant Meulet ra vezo; pegen gallouduz bennag hoc'h, n'hoc'h evit ober netra dreist ar Zakramant-ma; ha pegen gouezieg bennag hoc'h, ne anavezit netra, hag a ve en tu all dezhan! Nan, ar pez hoc'h euz great, o va Jesus, evit prena deomp ar vuez kristen, n'eo netra e kichen ar pez a rit evit he c'henderc'hel! Ar garantez, a ziskouezit dinn o tont er bed, en eur c'hraou, o veva er baouren-tez, hag o vervel var ar groas, n'eo ket

da veza lakeat e kemm gant ar garantez,
a ziscouezet diun, e Sacramant ann Aoter.

Eur vam a vag he c'hrouadur; mes
c'hui, a ia larkoc'h. Ober a rit, o va
Zalver, ar pezh, ne reio hiskoas eur vam
evit he c'hrouadur, en despet d'ar ga-
rantez birvidik e deuz evinthan. Guelet
a rer eur vam, enn he joa, enn he c'haran-
tez evit ar bugel, e deuz lakeat er bed
hag a vag, hoc'h he starda var boull he
c'halon, oc'h he vriata, gant kement a
nerz, ha ken aliez a vech ma lavarfac'h,
e deuz c'hoant ar vam-ze, d'hen dibri
e beo; curus e ve, ma c'helfe en em
unani gant he c'hrouadur, souffr a unan
ganthan. Mes, kement-se a zo dreist he
galloud. Evidoc'h, o va Zalver Jesus,
n'euz netra dreist ho kalloud. En em
unani a rit gant ho pugale; en em rei
a rit da zibri dezho, dindan spesou ar
bara. Ar bara a zo boued ann den, e peb
bro. Kemeret hoc'h euz spesou ar bara,
evit diskleria deomp ez hoc'h e guirionez,
er Sakramant Meulet ra vezo, ar Bara a
vuez « *Ego sum panis vite.* » Gant nerz
ho komz oll c'halloudek, fiziet en ho

pried, hor Mam santel, ann Iliz Katholik,
ar substans, da lavaret eo, danvez ar
bara a zo chenchet enn ho Korf, enn ho
Koad, enn hoc'h Ene hag enn ho Tivinite.
N'eo ket falvezet deoc'h lezel, gant den
all ebed, ar garg da vaga ho pugale; hag
en em unani a rit, gant pebhini anezho,
enn eunn doare ken striz ma teu ann
Abostol sant Paul da lavaret: « Beva a
raun; ha c'hoas, ne ket me a vev, mes
Jesus-Krist eo a vev ennhon. » *Vivo au-*
tem, jam non ego, vivit vero in me Christus. »

Trivac'h kant vloas a zo, hoc'h euz
instituet ar Zakramant adorabl euz ann
Aoter: hag abaoue neuze, ar gristenien
a beb renk, a beb stad, a beb oad, a beb
kondition a gav, enn han, ar guir vuez,
ervez ma o poa hen diskleriet hoc'h
unan: « Ann nep, a zebro euz ar bara-ze,
a vevo da virviken; hag ar bara, a
roinn-me da zibri, eo va C'horf, a vezo
lakeat etre daouarn ar vourrevien, evit
silvidigez ar bed. » C'hui a zo, hag a vezo
bepred, o va Jesus, er Sakramant Meulet
ra vezo, nerz ar Verzerien, sklerijen ann
Doctoret, guir vuez ann oll dud fidel.

Sant Yan Chrysostom a lavare euz ar gristenien genta : « Eur vech, ma ho devoa resevet ar gommunion zantel, e teuent da veza henvel ouz leonet : n'ho devoa aoun rak netra. « Neuz ket pell c'hoas, eur paian a rea guall vuez d'ar gristenien, euz ann Tonkin; hag, evel ma oa eunn denn euz ar renk huella euz ar vro-ze, e lakeas kass, d'ar prizon, eur missioner. Anaout a rea, ann den fallakr-ze, argourach, a gav ann d'ar Gommunion, dreist oll pa' ma er boan. Goure'hemen a reas d'ar zoudardet divoall, gant aoun ma vije digasset d'ar Missioner he Zoue. « Rak, eme ann tyrant, eur Mandarin, eur vech m'ho deuz ar gristenien, debret euz ar bara-ze, ne ket possubl beza treac'h dezho, dont a benn anezho. »

Guelet a rann, o va Zalver Jesus, pegen guir eo ho komzou. Neuz ket a vir vuez kristen evit ann hini a zo lezirek da dostaat ouz Sakramant ann Aoter. Hendiskleriethoc'heuz, enn Aviel : « E guirionez, e guirionez, m'hel lavar deoc'h, ma ne zebrit het Korf Mab ann Den, ha ma ne evit kel he C'hoad, n'ho

pezo ket ar vuez ennoc'h. » — Eur vezen, ma neo ket douret he grisiou, a deu buhan avoalc'h da zisec'ha. C'hui eo, o va Doue, ann eienen a gendalc'h glaz ha druz ann delliou, e guezenn ann Ilis. Meser vezen-ze, evel var ar guez-all, e velann delliou melenet. Ann delliou-ze n'eo ket krenv enn vuez enno; n'int ket stad mad ouz ar skourr. Anter varo int. An disterra taol avel a laka anezho da goueza d'an douar; hag eur vech kouezet, araok dont da vreina ha da ober mannou, in taolet ha distaolet, ruillet ha diruillet gant ann avel-dro, evel traou maro. Ni ivez, o va Jesus, eur vech commanset da veza lezirek da dostaat ouz ar zakramanchou, ha, dreist oll, ouz Sakramant ann Aoter, ar vuez kristen n'e ma mui krenv enn hon ene. Hor feiz a deu, evel pa lavarfen, da veleni, n'omp ket ken aketus da lavaret hor pedennou, ha pa lavaromp anezho, n'oneus ket kementac'houde. Ann disterra digarez hon laka d'ho dilezel. Laoskaat a reomp ivez evit hon deveriou all a gristen. Eleac'hen em ren, ervez krennennou ha lezenno ann Aviel, e kavomp

guelloc'h en em drei varzu plijadurion ha madou ann douar. Marteze e chom c'hoas eunn nebeut buez bennag ennomp, stag omp c'hoas ouz ar vezen; mes ann distera guall-skuer pe kentel falla zo avoalc'h evit lakaat ac'hanomp da goueza d'ann douar, da goll hor feiz. Neuze, evel ann delliou maro a vez ruillet ha diruillet gant ann avel, m'a vez taolet ha distaolet gant hon ioulou fall. Kredi a reomp buhan ar pez a zo kontet deomp, gant heman gant hennont a eneb ar relijion, a eneb ann Iliz, enn hoc'hen eb, o va Doue, Ar maro a deu d'hon ene; hag eunn dra varo n'e zale ket da vreina. Ar pen kaos euz ar guall heur-ze eo atao, dilezel ar Gommunion santel.

Ia, o va Zalver Jesus, buez va ene eo Sakramant ann Aoter. Ma n'ho resevann ket bep ar mare, ar santimaichou a feiz hag a garantez emeuz em c'halon a goll ho nerz. Ann tan enn oalet a deu da vervel, ma ne laker ket a goad ebars, eur vech ann amzer. Egisso va ene paour a deu da ienaat ma chomann pell eb ho reseo, er Gommunion zantel, eb tostaat

va c'halon ouz ho Kalon sakr.

Enn Tabernakl, ne ket ebken evel madurez hon eneou, e chomit kuzet, dindan spesou ar bara; ne ehanit ket, noz-deiz da bedi Doue, ho Tad, da gaout truez ouzomp. Ho pedennou hag hoc'h hirvoudou santel a zav betek barr ann Eavou; miret a reont ouz breac'h justis Doue da goueza varnomp, ni tud ken kaled, ni ken ingrat! Lod a zo, siouas! ken dallet gant braoigou ar bed, ne reont forz evit terri al lezen gristen. Klevet a rer anezho o lavaret peb-seurt komzou iud hag euzus. Enn amzeriou trist-ma a rear eur brezall-fallakr d'hor Mam Zantel ann Iliz; ha c'hui o va Zalver trugare-zus, ne ehanit ket enn Tabernakl, evel guechall var ar groas, da lavaret d'he Tad: « Va Zad, pardonit dezho, rak ne c'houzont ket petra reont. »

O va Jesus, nag a vad a ra d'am ene ar sonj euz kement a vadelez! Crenvaat a ra va c'halon, ha va c'honsoli a ra ar sonj-ze, enn draonien-ma a zaelou. « Va ene a ro gloar ha meuleudi deoc'h, ha va c'halon a zrid gant ar joa, o-sonjal er

pez hoc'h euz great em c'henver, c'hui va Doue ha va Zalver. » Ra vezinn bepred, hed va buez, ho krouadur sentuz hag anaoudek. Evitse e pedinn ar Verc'hez Glorius Vari, ha lavaret a rinn diou zizenez euz ar chapeled, enn esperans da gaout ar c'hraess kaer-ze dre he intercession.



AR BEËN

Goude beza rentet deoc'h, o va Jesus ann enor, a ioa dleet evel d'am C'hrouer ha d'am Zalver, goude beza ho trugarekeat deuz kement hoc'h euz great evidhon, hag a rit c'hoas bemdez, e teuann breman, da c'houlenn, diganeoc'h, sklerijen ha nerz, da vale dre hent ar silvidigez, d'ho pedi, da skuill ho pennos hag ho trugarez var ar c'herent ken beo, ken maro, var ar barrez-ma, var ann Iliz, hor Mam muia karet, var hon Tad santel ar Pap ha var ann Aotrou n'Eskop a Gemper. C'hoant emije ivez d'ho tigoll, ervez va galloud, euz ann dismegans, a rear deoc'h er Zakramant Meulet ra vezo, ha da c'houlenn pardon evit va fe-c'hejou va unan.

Gourc'hemennet hoc'h euz deomp, pedi atao, eb ehan ebet. *Oportet semper orare et nunquam deficere.* » Chomp eppedi a vije, euz va ferz, beza dianaoudek ha

diskiant. N'emeuz ket aoun, da anzeo va faourentez ha va sempladurez. Perak e kemerffen-me fouge gant madou, ha n'int ket dinn ? An nebeut emeuz, a zo bet diganeoc'h ! Divalo eo klevet ar paour o fougeal gant ann dillad, en deuz roet dezhan, ann aluzen, ann den pinvidik. C'hui eo, o va Doue, hoc'h euz, enn ho madelez, roet dinn ar pezh emeuz. Ar vuez, ar iec'het, ann oll madou a zo etre ho taouarn. Pa blijo deoc'h ho zenna diganinn, n'emeuz nemet ho trugarekaat, evel ma reas guechall ann den santel Job. Goulskoude, nag a valheuriou a gouezas varnezhan ! Laeret dezhan he chatal ; kollet ganthan he oll vadou ; he vugale zoken a zo lazet, flastret dindan mein ann ty, kouezet enn he boull. Pa glevas ar c'heleier estlammus-ze, Job, eme ar Scritur Sakr, a zavas enn he zav hag a rogas he zillad ; ken rannet oa he galon gant ar c'hlaç'har. Mes, he feiz a c'hounezas var ar rann galon. En em strinka a reas d'ann douar, evit hoc'h adori, o va Jesus ; hag elavaras, ann dour enn he zaoulagad : « Neuz forz : Doue eo en devoa

roet dinn va madou ha va bugale ; Doue eo, en deuz ho lamet diganen, ra vezo he hano bepred meulet. » Nebeut goude, ann den santel-ma a gouezas klanv, he unan. He gorf-oll, a oue goloet a c'houlou ; eunn donjer oa sellet ounthan. Job n'en deuz c'hoas da lavaret nemet comzou, leun a fizians he madelez he Zoue : « Daoust, amezhan, ha ne ket, euz a zaouarn ann Aotrou Doue, eo hor boa resevet hor madou ? Perak eta ne resefsemp-ni ket ivez, euz he berz, ar poaniou, a blij ganthan da zigas deomp ? »

Setu aze, ar santimanchou a garfenn kaout bepret beo em c'halon. Goulenn a rann diganeoc'h, o va Zalver, kuzet er Sakramant Meulet ra vezo, ar c'hrass-ze da gendele'her krenv ha nerzus, ennhon ar feiz hag ar garantez emeuz evidoc'h, evit ma c'hellinn lavaret, e pep occasion, e guirionez : ia, o va Doue, « o polontez bezet great, ha ne ket va hini-me. » Gouzout a rann ervad var ann douar-ma, galvet eunn draonien a zaelou, n'emeuz da c'hedal nemet poan : poan gorf ha poan speret. En em staga a ra ouzomp.

enn eunn doare bennak ; ha pa sonjomp ann nebeuta, ar boan a zo var hon roudou. Mes, er bed-ma tremen a ra pep tra ; netra neo padus, nag ar iec'het, nag ar c'hlenvet, nag ar plijadur, nag ar boan. Perak e c'houlenn beza bepred eurus ? Eurus avoalc'h e vezinn en ho Parados, o va Jesus, nemet em bezo var ann douar-ma, nerz kalon da gouzanv hag al labour, hag ar c'hroaziou, a vez digasset, dinn gant ho torn, atao trugarezus. Eunn tad a glask bepret interest he vugale ; ha c'hui, o va Doue, a voar guelloc'h ar pez o c'hell ober vad dinn. Madou ar bed-ma, ar blijadur, ar iec'het zoken, pa rer gual implij anezho a gollannden. An denvalijen na deu en he speret. Evel eur goumoulen denval a zav a zioc'h he benn, hag a guz dezhan ar guel euz ar Barados, he c'huir bro. Trei a ra-he zaoulagad varzu ann douar. Ankounac'heat a ra he Zoue hag he silvidigez. Goulen a rann ar c'hras-ma, n'en em gavokete eunn henvelep malheur ganen. Douget hoc'h euz ho kroas pounner, o va Zalver, var hent tenn ha poanuis meurbet ar C'hal-

var. Dinn ivez da vont d'hoc'h heul, ha va foaniou a vezo skanv, e skoasann tourmanchouskrijus, hoc'heuzgouzanvet evit va silvidigez. Ar boan, p'eo digemeret gant feiz hag a galon vad, a ro sklerijen ha skiant vad d'ann ene. Perak eta tec'het diouz ar boan ? Evel ma lavare eur belek santel, ann Aotrou Persoun Ars : « Nep piou bennag a glask atao tec'het pell diouz ar groas, a gav anezhi e pep leac'h ; hag, er c'hontrol, ann hini a glask ar groas, n'e gav anezhi e neb leac'h » Roit dinn eta ar c'hras da vezo bepred a unan ganeoc'h, keit ha ma vezinn beo var ann douar-ma.

Reuzeudik eo ar c'hristen n'en deuz ket eur feiz krenv, hag ho krass evit hen harpa, er bed-ma. Dont a ra buhan da fall-galoni, ha da fazia. « Bresk ounn evel eur gorzenn ; eunn netraik a raffe dinn terri. » Dismantret eo bet va ene dre ar pec'het, o va Jesus. Henvel ounn ous eunn den, hag en deuz bet eunn derchen dom. Nerzus bras oa araok koueza klauv ; goudeze e chom dinerzet. Kaer en deuz ober, he nerz ne deu ket dezhan ; ha red

eo implija louzou bep ar mare. » Santout a rann em ezili c'hoantegesiou ne reont nemed enebi ouz lezen va c'houstians. Ann ioulou fall a glask bepred trec'hi va santimanchou mad. » Anzañ a reukann, « ar berad gliz, o krena var an dellien, ne gouesfe ket buhanoc'h ebars er pri. Mar d'ounn eb nerz, dispount ounn evelato ; gant ho krass n'emeuz aoun rak netra. Ia, ar gorzennic, p'en em stag ouz ann dero, zo, diouallet enn tourmant ar brassa. » C'hui eo, o va Jesus, ar vezen dero-ze. Chom a rit kuzet dindan spesou ar bara, er Sakramant, Meulet ra vezo, eus ann Aoter, evit skoazella ac'hanon. Adam hag Eva, va zud kenta, a gavas eur vezen, e Barados ann douar; ha frouez ar vezen-ze, hanvet guezen ar Vuez a dlle miret outho da glenvel ha da vervel. Ar gommunion santel a vir ouz va ene da glenvel ha da vervel. Eur vech ma emeuz resevet ac'hanoc'h, e Sakramant an Aoter, « ar goad a red freskoc'h em goaziet; ne grenann mui kement terchen ar guall dechou. Va c'halon baour ennhon' zo iaouankeat. » Dont a ra dinn tomber ha nerz d'ho karet,

ha da veza treac'h d'ann drouk. Ma n'ho resevann ket breman epad ann heur Adorasion, aze emaoe'h goulskoude, enn Tabernakl, evel ann tan enn oaled. Ne c'heller ket tostaat ouz ann oalet el leac'h ma' zeuz tan, eb paka eun dra bennag euz ann domder, a ro ann tan; Grit eta, o va Jesus, ma teui c'hoas va feiz da greski, va esperans ennhoc'h da startaat, ha va c'harantez evidoc'h hag evit ho lezen zantel da vrassaat; evit n'e glasko hiviziken va ene ha va c'halon kaout nemedoc'h da Aotrou,

Va dever eo ivez pedi evit va zud, ken beo, ken maro. Great hoc'h euz deomp, o va Zalver, eur gourc'hemen striz da garet hon nessa. Ha piou eo hon nessa? Kement den azo, memes hon enebourien. Mes, er renk kenta, ho pedann da skuilla ho pennos hag ho krasou puilla var ann tad hag ar vam, emeuz bet digantho, er bed-ma, enn ho koude, kement vad' zo enn dro dinn. Ra zeuinn dre va bolontez vad, va respet ha va sentidigez, da zigoll anezho euz ar boan o deuz kemeret ganinn, da lakaat er feson-ze eunn tam

laouennidigez en ho c'halon, aliez ken sammet gant ar c'hlae'har hag annanken. Petra bennag a vije da lavaret euz va zad ha vam, pegen paour ha pegen dister e vijent er bed-ma, na lakainn va oll boan da rei dezho pep tra, ervez va galloud. Hi o deuz divoeret ken alies a dra evit ho rei dinn, ha kals alies-soc'h ha kalz muioc'h eget na c'helfen morze da ober evitho. Ra c'hello va zad ha va vam, en ho c'ho'sni, kaout ar blijadur da velet enn dro dezho, o serra ho daoulagad, bugale ken karantezus ha ma oc'h bet hoc'h unan, o va Jesus, evit ar Verc'hez Glorius Vari ho mam ha sant Joseph ho Tad mager. Goulen a rann evitho, dreist oll, ar c'hra'ss da gaout goude eur vuez kristen, eun digemer mad en ho Parados.

N'emaomp, var ar beg douar-ma, nemet treminidi. Lod euz va c'herent a zo dija eat, em raok, dirak ho barnedigez hag e c'helfent beza e tan ar Purgator o peur-baea ho dle. Ho pedi a rann da astenn dezho eunn dorn trugarezus, evit ho zenna, eb dale, euz al leac'h a

boan-ze. Petra bennag m'eo deut ar maro da lakaat disparti etrezomp, n'en deuz ket mouget ar garantez emeuz evitho. Kinnig a rann deoc'h, o va Jesus, evit delivrans ann eneou keiz-ze, ann induljansou a deuz hor Mam santel ann Iliz da rei dinn, enn occasion ann Adorasion.

Grit ma teui ivez va breudeur ha va c'hoarezet d'en em glevet etrezho. Nag hen a zo kaer, nag hen a zo dudius, guelet eunn tyegeziat tud o veva e peoc'h ! Ra ziuallinn bepred da ober gaou d'am nessa enn he zanzez ; enn he vrud vad, eun he iec'hed, enn he vuez, Grit m'a vo gellet lavaret ac'hanomp, er barrez-ma, o va Zalver, ar pe'z a lavare, guechall, ar baianet euz ho tiskibien genta : « Guelit, pegement en em gar etrezho, tud ar barrez-ze ! »

Roit d'ann Aotrou n'Escop a Gemper, da velein ann Escopti ha, dreist holl, da re ar barrez-ma, hag a laka kement ho foan da skigna hoc'h hano hag ho karantez santel en hon touez, arpeza zo red dezho da gaout evit hon hentcha, hag hor sikour da ober atao ho polontez. — Mantruz

eo ar brezel a zo great hirio d'ann Iliz katholic. Avel diroll ara. Bagik sant Pera zo taolet ha distaolet. Tarzious mor spontusa gouez varnezhi. N'euz forz aze. Her gouzout a rann ervad, hag ann Ilis, gant ar mor, ne c'hell ket beza lounket; harpa a reio bepred ouz Satan hag he gounnar. Ennhi e m'oc'h asezet, o va Jesus, gant sant Per pe hon Tad santel Leon XIII. Pa blijio ganeoc'h, e lakeoc'h annavel hag ar mor da derri. Grit ma chominn krog stard, dre va feiz ha va sentidigez, e bag sant Per, da lavaret eo, ar c'henteliou a deuo diunn ouz perz hon Tad santel ar Pap; ha ma ne ziskroginn biken, evit koueza e mor ar bed. Dreze ec'h esperann eunn dervez douara var aochou eurus ho parados.

Breman, setu deuet, o va Zalver Jesus, ar mare evidhon da zispartia diouzoc'h. Laouen eo va c'halon, p'eguir emez gallet displega dirazoc'h, epad ann heur santel-ma euz ann Adorasion, ann oll santimañchou a feiz hag a drugarez, ann oll ezommou en deuz va ene. C'hui eo hoc'h euz lavaret deomp-ni : « Deuit oll dave-

dhon-me, c'hui a zo er boan hag a zindan ar beac'h, ha me a roi deoc'h eunn nerz nevez. » « *Venite ad me omnes, qui laboratis et onerati estis, et ego reficiam vos.* » Deuet hon davedoc'h. Pedi a rann ho Kalon sakr, da rei digemer d'ar c'hontegesiou santel emez roet deoc'h da anaout. Goulenn a rit diganinn va c'halon. Hen rei a rann deoc'h. Ho tra eo, deoc'h eo, va C'hrouer, va Zalver ha va Mestr. Ha da biou e c'helfen-me rei va c'halon nemet deoc'h? Petra en deuz kavet biskoas kalon ann den o redek varlec'h plijadureziou ar bed, hag o c'heulla he dechou fall, nemet poan hag anken ! Ia, c'hui, o va Jesus, a vezo va joa, va fiziansha va eurusdet. Maskuizann avechou gant ar boan, gant ann tentationou a gouez varnomp, ken stank, epad ar vuez-ma, me a deui d'ho kaout, peguir hoc'h euz ar vadelez da jomen hon touez var ann Aoter. Tostaat a rinn bep ar mare ouz ar gommunion zantel. Maga a rinn va ene gant bara ann Elez. C'hoant emez da renta deoc'h karantez evit karantez, ha d'ho tigoll, ar guella ma c'hellin, euz ar boan a vez great

deoc'h gant ken aliez a hini etouez ho
pugale. Evel ann Eal a deuas aberz Doue,
ho Tad, d'ho krenvaat er jardin Olivez,
epad ma voac'h o c'houezi ann dour hag
ar goad, gant hoc'h enkreuz evit silvidi-
gez ar bed, e karfen diskuez deoc'h bras-
soc'h karantez, en eur souffr gant muioc'h
a batiantet defetou va nessou, hag ann oll
boanion a zigassoc'h dinn. Labourat a
rinn da lakaat va breudeur da anaout
mui-oc'h-mui, bemdez, ar furnez hag ar
peoc'h, a gaver en ho servich. Grit eta,
o va Jesus, ma vevinn ha ma varvinn enn
ho krass, evit galloud ho karet, hoc'h a-
dori, ho meuli hag ho trugarekaat er
bed-ma hag er Barados, gant ann Elez
ha gant ar Zent.

Evelse bezet great.

Ra vezo bepred meulet ha trugarekaat
kor Zalver Jesus-Christ e Sacramant ado-
rabl ann Aoter. (400 devez indulj.)

Lavaret, enn eur achui ann heur Ado-
ration, pemp *Pater*, pemp *Ave Maria* ha
pemp *Gloria Patri* en intantion hon Tad
santel ar Pap, evit gounit ann induljansou.

Quimper, le 26 Décembre 1885,

IMPRIMATUR

SERRÉ.

Vicaire Général.

